

# MARI BEG A ROG HA FRI PARTOUT

*Var ton : Son an dançou.*

Mar oc'h eus c'hoant, va mignonet, d'a anveout eur vreg rog,  
 Me o kunduo, pa guerfet, dirag Mari beg a rog,  
 Bemde var dro eun heur anter e cluc'h var treujou e dor,  
 Kerkent teodou pig ar c'hartier gant eur skaoun pe eur gador  
 A zired oll en e c'hever ; an audianç so digor,

Var barlen Mari e veler eur pes foul tren assied,  
 Var bini e cont pep kommer kement e deus inventet ;  
 Klevet a rêt pet den lipous a ya bemde d'ar c'hafse,  
 Pet plac'h e deus tri amourous, ha pet a zo stad enne :  
 Pet ozac'h a zo mewier, ha pet a bil o grague.

Mari beg a rog a gommand var ar c'honseil divragou,  
 Eb kaout an nebeuta damant e tigor franck e guenou,  
 Pa ne deveus var e bizach na moustachou na baro  
 E red dêi kaout an avantaj da zikrial tud ar vro,  
 Guêvier, sotoui, kos langach, flud a bep kalite zo.

Mari beg a rog so titret vel an huella noblanç,  
 Dommaj ê n'en d'ê ket pried d'eun den pinvidik a Franc ;  
 I ê princes an diegi, comtes al liboudennou ;  
 I ê dukes al loustoni, marquises ar strakellou ;  
 Gouarneres ar jolori, baronez ar pillow,

Kerkent a ma ve imban net daou den yaouank da zimi,  
 E ve, d'al lun vintin, galvet e c'honseil bras gant Mari ;  
 Pep konseiller en gueleden a boagu gant e vouton bêr,

Evit klask ar guellan moyen da derri pront an affer.  
Ar plac'h a gar ar jigoden , pe ar goas a ve mèvier.

Ar re voassa da zikrial an dud a ya en fortun ,  
A zo , evit an ordinal , merc'hed chommet eb nikun ;  
Merc'hed kes chommet da goza eb tapout eun tamik goas,  
Hac a gommanç brêma facha, dre ma ne deu den d'ho choas,  
Couskoude an hini gossa n'est ket tri-uguent vloa c'hoas.

Kerkent ha ma vel eun eared o tont varzu an Ilis ,  
Mari beg a rog a zired en manchou lous e hinvis ;  
Evel eur vioc'h ho vreskin e c'haloup abiou ar ru ;  
Holà ! Catel, Jeannet, Perrin , Soas, Mac'harid, deut dious-tu .  
Cetu aman eured Martin , deut da dremen ar rêvu.

Va c'hommer sellit eus hounes , dislivet e davancher  
E c'hornten zo eb ampes , hac e gueleden re vîr ;  
Ho ! sellit-ta eus an den-man , pegen striz è e vrugou .  
E dog so brassoc'h evitan ; ha kals re hir e vontou ,  
Eur chimizeten so gantan var a rochet en pillow !

Pa ve eur vreg kes gouilloudet , divars e bugen kental ,  
E c'houlen Mari estonet ; petra , nao mis so dija ?  
Me gave din voa an eured d'al lun goude pardon Pôl .  
Ha pask n'est ket c'hoas erruet ; allon ! grêd o deus an tol  
Eb n'o deveus va c'hemennet , an dra ze a gavan drol .

Pa gleô kloc'h Ilis ar barrous o c'hervel d'eur vadiant  
Mari gant eun troad eb botes , a erru arog ar chant ;  
Mæs, dre valheur n'eus ket ezom demeus eur voues ken raouliet  
Da zikour kana *Te Deum* evit an nêve ganet .  
Gant e c'hommerezet e chom e kichen dor ar vêret .

---

En ty ar Goffik en Lannuon.